

## LAVARIOU KOZ

---

Reo gwenn er c'hresk  
 Amzer gaer ha fresk ;  
 Reo gwenn enn diskar  
 Amzer gleb hep mar.

Pa vez ann erc'h war ann douar  
 Na vez na tomm na klouar.  
 Pa varv eur gerc'henn gant ar rion,  
 Ann hini a choum a dal diou.

Kelc'h loar dioc'h ann noz,  
 Glao pe avel antronoz.

Glao da zul, glao da lun,  
 Glao e-pad ar zizun.

Nedelek seac'h ha Pask gleboroc'h,  
 A ra d'ann arc'h beza barroc'h.

E miz mae re glao bemdez  
 Re nebeud pep eil devez.

Pa zao al loar abarz ann noz,  
 Hadit ar panez antronoz.

Genveur a garg ar fos,  
 C'houevrer he dalc'h klos,  
 Meurs gant he louadenn  
 A zizec'h ar wenodenn.

Ne ket eunn devez tomm a ra ann hanv.  
 Nag eunn devez ien ar goanv.

Gounid oc'h diskar loar gwengolo,  
 Na vez na greun na kolo.